

6  
1

# GUERZENNOU

EVIT

PELERINET SANTES ANNA VENED




BREST

IMPRIMERIE HUBERT GRIESHEIM  
*(de Griesheim, Alsace)*

# GUERZENNOU

EVIT

PELERINET SANTES ANNA VENED



DEOMP DA SANTES ANNA

## *Discan.*

Itròn Santes Anna,  
Mirit ho Pretoned,  
Goulennit dreist pep tra  
Ma vemp fidel bepret.

1.

Deommp da Santes Anna,  
Ia! deomp oll, Bretoned l  
Eno an nep a ia  
Ganthi zo chilaouet.

2.

Evidomp, ô na sked  
Ha levez ive,  
P'en deus hor c'hemeret  
Evit he bugale!

3.

Evidomp-ni a splann  
He c'harante vrasa;  
Etrezomp hi a rann  
He burzudou caëra.

4.

O nag a glanyourien  
En em erbed dezhi,  
Hag er goassa anken  
A gav ziçour ganthi ?

5.

Pet guech n'euz hi rentet,  
O madelez dispar !  
D'an den dall ar gueled,  
Ar c'hleved d'ar bouar ?

6.

Pet guech var ar mor braz  
Da dud o vont da goll,  
P'hi fedont, a zigass  
Avel mad en eunn taol ?

7.

Itrôn Santes Anna,  
Da viken trugarez !  
Ni a zeuio gant joa  
D'ho cuelet bep bloavez.

8.

C'hui, tud guen dre an oad,  
Na zonjit ket an hent,  
Ganthi goulennit mad  
Mervelevel ar zent.

9.

Tud iaouank, ha da vad  
A c'houll carout Doue,  
It da c'houllen timat  
Miret glann hoc'h ene.

10.

Deut, c'houi mammou tener,  
Evitho pugale ;  
Diouthi kemerit scouer :  
Hi zo bet mamm ive.

11

Guerc'hezed, deut d'he zi,  
Hi n'ho tisprijo ket;  
Mamm ar Verc'hez Vari  
A gar ar guerc'hezed.

12.

Ha c'houi, labourerien,  
Gant an drevel goasket,  
Deut da laret ho poen :  
C'hui en deus dibabct.

13.

N'e ket d'an den ouz ker  
Gant dillad-zei guisket,  
Nan ! mes d'eul labourer  
En deus n'em ziscouezet.

14.

Ha c'hui 'ta, mordaidi,  
Ken lies en danjer,  
D'ho sicour pedit-hi,  
E creiz ar goall-amzer.

15.

Dreist d'ho penn pa zavo  
Ar mor he goaghennou,  
D'ezhi 'vit m'ho coarno  
Gloëstrit ho calonou.

16.

Na vern gant pe seurt gloaz  
A vefec'h tourmantet,  
Hi a ghennerz æz-braz  
Ar c'horf hag ar spered.

17.

'Vel eur pirc'hrinded  
A dremen hor buez ;  
Evel d'han eo calcd,  
Leun a dristidighez.

18.

O mam ar Vretoned,  
Piou n'ho car en hor bro ?  
Ra vimp ho pobl caret  
Breman varc'hoas, ato !

19.

Grit d'comp-oll dere'hell mad  
D'ar feiz e pep mare,  
Ma vo Jesus dalc'h-mad  
Hon tad hag hor roue.

---

**SANTES ANNA HOR PATRONEZ**

*Diskan.*

Santes Anna, hor patronez,  
Hor sicouret en danger,  
Ha bezit hon alvocadez  
Dirag Jesus hor Zalver.

1.

Saludomp gant devoision  
An Itron Santes Anna :  
Leveromp dezi a galon  
En he chapelic ama :

2.

Santes Anna mam ar Verc'hez,  
A dra zur zo galloundus :  
He merc'h eu envzo rouanez,  
Guir mam d'hor Salver Jesus.

3.

Pep-unan da Santes Anna,  
Gant fizians erm he boaniou,  
A velomp oc'h eu em voestla  
Hac o vont d'he chapeliou.

4

Ar vam evit he bugelic,  
D'an Itron Santes Anna  
A ra bemdez eur bedennic,  
Hag a zesk deza kana :

5.

Ar soudard o vont d'an arme  
D'an Itron Santes Anna  
En em erbedo, a neuze  
A guerzo en eur gana :

6.

Ma teu an tourmant da c'houeza,  
Ar martolot a bedo  
He Batronez Santes Anna,  
Ha dizoursi a gano :

7.

Al labourer var he dachen,  
Evit en em ziscuiza,  
Dioc'h he dal a sec'h ar c'houezen  
Hag en em ro da gana :

8.

Ar pastos e bar ar menez,  
He zened en dro deza,  
Lies a veach d'he Batronez  
Oc'h euz clevet o cana :

9.

O vont d'ar mintin d'he d'he zervez,  
Ar micherour a bedo  
Santez Anna he Batronez  
Ha gant fizians a gano :

10.

E pep korn eur a Breiz-Izel  
An Itron Santes Anna  
E deus eun ilis, eur chapel;  
Deomp oll di ba bardouna.

11.

Evel hon tud coz, Bretonet,  
Henoromp Santes Anna,  
Pe'z omp klan, pe'z omp ankeniet,  
Ne skuizomp ket o cana :

---

**ENOR, BENNOZ DA SANTEZ ANNA**

*Disân.*

Enor, bennoz da Santez Anna,  
Meulomp, meulomp ar Vam ar wella!  
*pe* Santez Anna, Mam a garantez,  
Taolit varnomp eur zell a druez !

KENTA LODEN.

1.  
Canomp a vouez huel  
Mam goz hon Doue ;  
Ni oll, e Breiz-Izel,  
'Zo he bugale.

2.  
Itron Santez Anna,  
Clevit hor peden ;  
Ni a zeu da gana  
Ama 'neur vanden.

3.  
Ama da zaoulina  
Ebarz ho chapel,  
Itron Santez Anna,  
Ni 'zo deut a bell.

4.  
Nijit a denn-askel,  
Elez ann envou,  
Ha gant tud Breiz-Izel.  
Savit hu moueziou,

5.  
Bleuniou euz ar prajon  
Ha c'hui, laboused,  
Stered euz ann envou,  
Lavarit bepred :

6.  
Guechall, tud hor bro geiz  
Siouas ! oa renet,  
Dizoue ha difeiz,  
Gant ann droug-spered.

7.

An dizurz, ar pec'hed,  
Eur vuez diroll,  
Gant ann dizlealded  
'Oa lod cazi oll.

8.

Mam ar Verc'hez Vari  
A bedas Jesus :  
« Va Zalver, eme-z-hi,  
« Bezit truezus !

9.

« Evitho 'peus skuillet  
« Ho coad precius ;  
« Ganeoc'h int bet prenet  
« Truez, o Jesus. »

10.

Hogen, en amzer-se,  
E oa eur c'hristen,  
Guir zervicher Doue,  
Fur, ha guella den.

11.

Gant feiz ha carantez,  
Gant doujens ive,  
Nicolazie bemdez  
A bede Doue.

12.

Eun nozvez, noz eurus,  
Er park, 'kreiz an hân,  
Eur c'houlaoüen lintrus  
A gherz dirazhan.

13.

Ag Evelse blieniet  
Varlec'h ez a eün,  
Ag e chomm zebezet  
'Kichen ar feunteun.

14.

'Kreiz caëra sklerijen,  
'Oa tra burzudus,  
Zavet var eur c'hoabren,  
Eun Itrôn skedus.

15.

Nicolazie spountet,  
D'ar person neuze,  
A ia da lavaret  
Enkrez he ene :

16.

« Ke, pen foll, rambreüs  
Eme ar beleg ;  
Ha gant comzou faeus :  
« Er mes, cöz-teodek ! »

17.

Peben den reuzeudic,  
Siousas...! gourdrouzet,  
Paour kez Nicolazie,  
Gant ann holl goapeet !

18.

En he dristighez,  
E ma confortet ;  
Rac breman ar zantez  
D'heän en deuz preghet

19.

« Perag e zout nêc'het  
« Nicolizie keiz ?  
« Lak diboan da sperc'h,  
« Chôm stard en da feiz.

20.

« Va zervicher fidel,  
« Den mui na c'houie,  
« Oa aman eur chapel  
« Caret gant Doue.



21.

« Me fell d'in adarre  
« Ama bea pedet,  
« Pedet e peb Oare,  
« Gant ar Vretoned.

22.

« Aman eo red sevel,  
« Bras, huel ha coant,  
« Em enor, eur c'hapel  
« Caout a ri arc'hant.

23.

Mont a reaz da gleuza  
Var lez an dachen,  
Ag euz Santez-Anna,  
'Cavas ar skeuden.

24.

'Tal an imaj santel,  
El lochen balan.  
'Teue tud Breiz-Izel,  
Stank evel guenan.

25.

Er Bocenno 'liez,  
Oll tud Keranna  
A gleve an Elez  
Laouen o cana.

26.

Er plas burzudus-se,  
Ken pel, oa zavet,  
D'ar vam a garante,  
Eun templ benniget.

27.

Ha piou hell niveri  
An oll miraclou  
Gret bep bloavez ganthi  
'Vit pep ezommou ?

28.

Hon tud coz deuz guellet  
Oant künz ha glac'har,  
An ilizou prennet  
'n'ho amzer digar.

29.

Breiziz, nag a enkrez,  
En tan poa devet  
Imaj ho patronez.  
Er gher a Vened !

30.

Coulscoude en Arvor,  
O mam dous ha mad,  
Ho chapel hu digor  
A chommas dalc'h mad

31.

Mil bennoz da Zoue  
A reas d'ar Frans  
Ar peoc'h adarre  
Goude an droulans !

32.

Bemdez ha pobl caret,  
O Santez Anna,  
Muioc'h mui zo deuet  
C'hoaz d'ho pizita.

33.

Hag evit dighemer  
Oll ho pugale,  
Ho chapel re zister  
Zo cavet neuze.

34.

Mes c'hui, pinvidien,  
Ro argant hag aour  
Ha c'hui ho kueneien,  
Tud diæz ha paour.

35.

C'hui, tud euz ar mezou  
A guennik ivez  
Mein-daill ar vengleun-  
[ziou,  
Derven ar menez.

36.

An otrou Guillouzo.  
Etal dor pep ti,  
En deus *clasket* er vro  
Digant pep-hini.

37.

Piou ve ar guir Breizad  
Da santez Anna  
Na ro a galon vad  
Eus ar beardra ?

1.

Santez Anna Vened,  
Bennoz d'hoc'h hano !  
O va mam bennighet,  
Diouallit hor bro.

2.

Soudarded Breiz-Izel  
Ken stard en emgan,  
A c'houlen ho skoazel  
Pa vent creiez an tan.

3.

Martolod 've clevet  
Pa dreuz a r mor donn :  
« Santez Anna Vened.  
« Pedit evidonn ! »

4.

Pieget var an dachen,  
Labourer douar,

38.

Eun iliz zo zavet  
Caër, nerzus ha coant,  
Gant mein dentelezet,  
Mabr, aour hag arc'hant

39.

Eun iliz-veur, huel  
Burzudus meurbet,  
Dre-oll e Breiz-Izel  
He fares neus ket.

40.

Evel eur rouannez  
Var lein an iliz,  
Skeuden hor Patronez  
A rên var Breiz !

EIL LODEN

Evel peb guir gristen,  
Bepred a lavar :

5.

O clack eun tam bara  
E harz toul an or,  
Kan., paour, Santez Anna  
Te gavo digor.

6.

Dirag Santes Anna,  
Paour ha pinvindic.  
It 'ta da zaoulina,  
C'hui tud reuzeudic.

7.

D'ann dall ro ar gued,  
Nerz d'an digalon,  
D'ar bouzar ar c'hleved,  
Peoc'h d'an anaon :

8.

Caout a ra d'ar pec'her  
Distro da Zoue,  
Ha dirag he varner  
Truez d'he ene.

9.

It, tañ, mam ha bugel,  
It, tud an Arvor,  
Diwrec'h ho mam zantel  
Deoc'h oll zo digor.

10.

Va mam! en horbro geiz,  
Guechall bro ar zent,  
Renevezit ar feiz  
Evel ma voa kent.

11.

Kusit hor bugale,  
O va mam zantel,  
Keit a ma vo arne  
Dindan ho mantel !

12.

Keit ha ma vo bleuniou  
E brük ar menez,  
D'hor mam hor c'halo-  
Zalc'ho carantez. [nou

13.

Eun deiz, en he c'hichen  
Ra vezimp eurus,  
Ra ganimp da viken :  
Bennoz da Jezuz !

J. SALAUN.

---

**AVE MARIS STELLA**

---

Ave, maris stella,  
Dei Mater alma,  
Atque semper virgo,  
Felix cœli porta.

Sumens illud Ave,  
Gabrielis ore,  
Funda nos in pace,  
Mutans Evæ nomen

Solve vincla reis,  
Profer lumen cœcis,  
Mala nostra pelle,  
Bona cuncta posce.

Monstra te esse matrem ;  
Sumat per te preces,  
Qui pro nobis natus,  
Tulit esse tuus.

Virgo singularis,  
Inter omnès mitis,  
Nos culpis solutos,  
Mites fac et castos.

Vitam præsta puram,  
Iter para tutum,  
Ut videntes Jesum,  
Semper collætémur.

|                        |                       |
|------------------------|-----------------------|
| Sit laus Deo Patri,    | v. Dignare me laudare |
| Summo Christo decus,   | te, Virgo sacrata.    |
| Spiritui-Sancto,       | R. Da mihi virtutem   |
| Tribus honor unus amen | contra hostes tuos.   |

---

**MAGNIFICAT**

Magnificat\* anima mea Dominum.

Et exultavit spiritus meus\* in Deo salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillæ suæ\* ecce enim ex hoc beatam me dicent omnes generationes

Quia fecit mihi magna qui potens est,\* et sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in progenies\* timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo,\* dispersit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede,\* et exaltavit humiles  
Esurientes implevit bonis,\* et divites dimisit inanes.

Suscepit Israël puerum suum,\* recordatus misericordiæ suæ.

Sicut locutus est ad patres nostros,\* Abraham et semini ejus in sæcula. — Gloria Patri.

---

**LITANIOU SANTES ANNA**

Autrou Doue, bezit truez diouzomp.

Jesus-Christ, bezit truez diouzomp.

Autrou Doue, bezit truez diouzomp.

Jesus-Christ, chilaouit hor pedennou.

Jesus-Christ, dighemerit hor pedennou.  
Tad eternel, guir Doue, bezit trues diouzomp.  
Jesus, zalver ar bed, guir Doue bezit truez diouzomp  
Spered Santel, guir Doue, bezit truez diouzomp  
Drinded Santel eun Dous hepken, bezit truez  
Santes Anna, pedit evidomp. [diouzomp.  
Santes Anna, mam-goz da Jesus-Christ,  
Santes Anna, mam ar Verc'hez Vari,  
Santes Anna, pried sant joacin,  
Santes Anna, mam-gaër sant Joseb,  
Santes Anna, lestr ar patriarch Noë,  
Santes Anna, lestr eus allians an autrou Doue  
Santes Anna, minez Horeb,  
Santes Anna, grizien Jesse.  
Santes Anna, guezen mad ha pinvidic,  
Santes Anna, guinien frouezuz,  
Santes Anna, ganet a lignez roue,  
Santes Anna, levezet an eled,  
Santes Anna, merc'h ar batriarched,  
Santes Anna, seleder ar brofeted,  
Santes Anna, gloar ar zent hag ar zentezed,  
Santes Anna, gloar ar veleien har ar gloër,  
Santes Anna, coumoulen leun a c'hliz,  
Santes Anna, coumoulen guon-cann,  
Santes Anna, coumoulen splann,  
Santes Anna, lestr carget a c'hrassou,  
Santes Anna, scuere a zentidigez,  
Santes Anna, scuere a batianted,  
Santes Anna, scuere a drugarez,  
Santes Anna, scuere a zevotion,  
Santes Anna, difenneres an Ilis,  
Santes Anna, retirans ar bac'herien,  
Santes Anna, scoazel ar gristenien,  
Santes Anna, dasprenerez ar brizonerien,  
Santes Anna, confort an dud dimezet,

Pedit evidomp

Pedit evidomp

Santes Anna, mam an intañved,  
Santes Anna, mam enorabl ar guerc'hez,  
Santes Anna, porz assur ar vartolodet,  
Santes Anna, hent ar veachourien,  
Santes Anna, iec'hed ar glanvourien,  
Santes Anna, pareans an dud goan,  
Santes Anna, sclerijen an dud dall,  
Santes Anna, teod an dud mud,  
Santes Anna, scouarn an dud bouar,  
Santes Anna, conforterez an dud poaniet,  
Santes Anna, patronez ar Vretoned,  
Santes Anna, zicour ar re en em erbed d'oc'h.

Pedit evidomp

v. Pedit evidomp, Santes Anna bennighet.

r. C'hui ag o peus ganet mam dinam an Añ-  
trou Doue.

PEDEN

O Doue, ag a zo plijet ganoc'h rei da Santes  
Anna bennighet ar c'hras da c'henel mam ho  
Mab unic, grit, ni ho ped, ma vezimp zicouret  
dirazoc'h gant ar Zantes-se o beuz zonz da he-  
nori. Dre veritou hor Zalver Jesus-Christ. Exelse  
bezet gret.

